

Kousk Breiz-Izel

An heol a zo kuzet, setu echu an de ;
Me glev ar c'hloc'h o tintal an ave.

Kousk, kousk, Breiz-Izel, bro dispar,
Setu an noz o tont war an douar,
Kousk, Breiz-Izel, bro ken mat,
Trouz ar mor bras a zav d'az luskellat.

C'houez vat an ed e bleun hag al lann afaouret,
War ar meziou gant ar gliz noz a red.

Ar yesterien a gan o fastum o loened,
Gwerziou Breiz-Izel n'int ket c'hoaz kollet.

En traoniennou didrouz, me glev kan an eostig,
Telenner noz, sonit flour ha dousik.

Breiz-Izel, douar sakr, a greiz kalon m'ho kar,
Bro all ken kaer n'eus ket war an douar.



Son ar Goulenn-Eured

Bonjour bonn' femm', roit (1) ho merc'h d'in, o !
Bonjour bonn' femm', roit ho merc'h d'in,
Ne vo ket maleürus ganin !

2 wech

Me yai d'ar park da labourat, o !
Hi 'jomo 'r gêr da luskellat !

Da luskellat ha d'ober tan,
Da domma yod d'an 'ni bihan.

Me vo kontant fin ar sizun,
Ma c'hellan kaout va zamm-butun.

Va zamm butun ha dek kweneg,
C'houlennin ken digant va gwreg.

Ha me vo fur betek mervel,
Ma c'hellan kaout ho merc'h Katell !

— Va fôtrig kêz, va merc'h Katell
Ne vo ket roet (2) d'eun den diboell !

D'eun den diboell ha d'eur feneant,
D'eul lonker chistr ha gwin-ardant !

Ar bleo 'zo savet en da zorn,
Kerz da rosti 'barz-an ti-forn !

Da chakochou (3) zo goullou-sac'h !
Kerz d'eul lec'h-all da glask eur plac'h !

(1) e Kerne : *grit*. — (2) e Kerne : *grêt*. — (3) pe : *da c'hodellou*.